

# SOÑNENNEU HA GUERZENNEU <sup>284</sup>

EIT

## KEYREDIGEHEU ER BAUTRED IOUANK

---

### SOÑNENNEU

---

#### I. ARAUK, PAUTRED IOUANK !

DISKAN

*Groamb trouz ar en doar ha soñnamb, pautred,  
Eit ma vou kleuet boéh er Vretoned.*

1. Pautred, ér fest hag ér pardon,  
Lakamb de drouzal en dason.
2. Ia, ia, soñnamb, hemb méh erbet :  
Gouiet e vou é omb ér bed.
3. Eit ma vou kleuet, ér hérieu,  
Boéh ha lavar kaer hun tadeu.
4. Eit ma vou gouiet, é peb léh,  
En des hoah Breih-izel ur voéh.
5. Eit ma vou kleuet hoah hiniù  
Hé boéh tro ha tro, dous ha kriù.
6. Soñnamb, pautred, er soñnenneu  
En des disket t'emb hur mammeu.
7. Eit ma vou kleuet, é peb ti,  
Er soñnenneu ag hur bro-ni.
8. Biken er soñnenneu galleg  
Ne helleint mui kousi hun beg.
9. Treitour, hanèh ne vennou ket  
Laret èl omb : Breton perpet !
10. Mar a huéh é larér, pautred,  
É ma ré goard er Vretoned.



11. Hardéh, aveit dihuen en treu  
En dès dihuennet hun tadeu.
12. Hardéh, aveit dihuen berpet  
Hun Doué hag hun lavar karet.
13. Én hur bro-ni brezél e zou ;  
Tré ma veemb biù, ni vrezélou.
14. Hag, ar hun lerh, hun bugalé  
E vrezélou èl omb eùé.
15. Kaer e vou gobér brezél d'emb,  
Bretoned gredus é choméemb.
16. Èl agent, larein e vou ret :  
Er Vretoned ne blégant ket.
17. O Bretoned, kent hi lahein,  
Hou Mam e glaskér ranjennein.
18. Arauk, pautred, aveit hou Mam ;  
Eit Breih-izel, berpet divlam !
19. Arauk, pautred, eit hé dihuen,  
Kent ma koéhou ar en dachen.

---

---

## II. IOUANKIZ BREIH-IZEL

1. Tud iouank bro Guéned, chetu arriù en dé,  
Chetu arriù en dé  
Ma vou ret t'emb dihuen frankiz ha liberté.  
Ma vou ret t'emb laret (reh ha splann dré er bed) (*bis*).  
É hes hoah tud dispont é misk er Vretoned.
3. É hes hoah tud dispont (kristénion eùé) (*bis*).  
Péré ne blégeint ket dirak er fallanté.
4. Nann, ne vern pégen kri é saùou er brezél,  
Ne vou ket ranjennet bugalé Breih-Izel.
5. Kaer en des er chetal gobér trouz ha safar,  
Pautred libr e vou hoah, tré ma véemb ar en doar.  
Hum sterdamb dorn én dorn ha soñnamb ar un dro :  
Mal-é ma vou gouiet più e zou mestr ér vro.

7. Mal-é ma houiou splann Franmasoned en diaul  
É hes hoah Bretoned krechén édan en hiaul.

8. Bretoned hag e ven goarnein en Ilizieu,  
En Tourieu dantellet, saüet dré ou Zadeu.

9. Bretoned hag e ven kleuet boéh ou Bélean  
É laret d'er geh tud pégen kaer-é en Néan.

10. Bretoned hag e ven guélet er Vugalé  
É tiskein a vihan lézen en Eutru Doué.

11. Hun Tadeu guéharal, aveit dihuen er fé,  
En des skuillet ou goéd, ni er skuillou èl d-hé.

12. Ni er skuillou èl d-hé, pe saüou er brezél,  
Eit goarn inour Arvor hag é hizieu santél.

13. Tud iouank, damb enta, damb ol a vandenueu,  
De ziskoein é omb hoah hanval doh hun Tadeu.

14. De ziskoein é houiamb, hiniù èl guéharal,  
Hemb doujein dén erbet, cherrein beg er ré fal.

15. Cherrein beg er ré fal e glah, hiniù en dé,  
Flastrein édan en treid inour ha libérté.

Karamb Doué hag hun bro, hun fé hag hun lavar,  
Ha iouankiz Arvor n'en devou ket hé far.

---

---

### III. BRO GOUH ME ZADEU

DISKAN { *O Breih, mem bro, mem bro, m'hou kar ;*  
*Saüet hou pen, o Bro hemb par,*  
*Ha hui vou rouañnez ar en doar.*

1. Ni, Bretoned, karamb, karamb hun guir vro ;  
Hanaüet-é ha brudet mat tro ha tro.  
Aveit hi hun tadeu en des brezélet ;  
Ruet ou des-hi get ou goed.

2. Doar hun Sent kouh, doar santél, o Breih! m'hou kar!  
Bro erbet ne garan kement ar en doar ;  
Pep moten, pep éval e hoarn relégu  
Bretoned kouh, hun gourdadeu.

3. Er Vretoned e zou tud kriù ha kalet,  
Er bobl kalonékan e hel bout kavet ;  
Get ou soñnenneu dous, kañnet tro ha tro,  
O ! na kaeret-oh hui, mem Bro !

4. Goudé brezéliou bras, mem Bro diskaret  
En des dalhet ataù d'hé lavar karet ;  
Ha berùein e hra hoah goed hé Bretoned ;  
• Mem Bro, saùet hou pen, saùet.

---


---

#### IV. BREIH DE VIRÛIKEN


DISKAN { *Laramb enta, kañnamb a bouiz hun pen :*  
*Breih de virùiken ! Breih de virùiken !*

1. É Breih-Izél saùamb hun baniéleu  
Èl guéharal hun gourdadeu ;  
Ni, Bretoned, ne houïamb ket plégein,  
N'hun es biskoah gouïet krénein !  
Laret enta, kañnet a bouiz hou pen :  
Breih de virùikin ! Breih de virùikin !
2. Laret ou des : Ne vou mui meit galleg  
Aveit mougein er brehoneg ;  
Ret é goapat er houh guskemanteu,  
Ha kas en dud rah d'er hérieu.  
Laret enta, etc...
3. Allas ! guir-é. er vro zou dilézet  
Get huéh kant mil a Vretoned ;  
É mant dré Frans hemb konfort é valé,  
Ha Breih e ouil d'hé bugalé.  
Laret enta, etc...
4. É Breih-Izél, guélet e hrér dareu,  
Kleuet e hrér trouz ranjenneu ;  
Nen dé ket hoah falleit goed hun tadeu,  
Berùein e hra én hur manbreu.  
Laret enta, etc...
5. Karamb hun bro, groamb ma saùou hé fen  
Èl ur hastel drest ur blénen ;  
Ha ni, pautred, dispégamb hun baniél,  
Ha lakamb ean é léh ihuél.  
Laret enta, etc...

6. Én Oriant, é Pondi, é Guéned,  
Korn er brezél, soñnet, soñnet ;  
Ha, tro ha tro, houlenneu bræs er mor,  
Saùet hou poéh drest en Arvor  
Aveit laret dré er vro, pen der ben :  
Breih de virùikin ! Breih de virùikin !
7. Ni, Bretoned, ne houiamb ket plégin,  
N'hun es biskoah gouiet krénein :  
*Merùel kentoh eit bout dizinouret,*  
Haneh-é gir er Vretoned.  
Laret enta, etc...



## GUERZENNEU



### I. DOUÉ DE VIRÛIKEN

DISKAN : { *Laramb enta, kañnamb a bouiz hun pen :*  
*Doué de virùiken ! Doué de viruiken !*

1. O Bretoned, stertet hra er brezél  
Éneb d'hun Relijion santél ;  
Tud lan a gaz hum dolp eit hi skarhein,  
Ni, hum dolpamb eit hi goarnein ;  
Laramb enta : Ni vrezélou eit Doué,  
Ha kentoh merùel aveit kol er Fé.
2. Skarhet ou dès, taulet ou dès ér méz  
Ag er skolieu limaj er groéz,  
Aveit lemel get er vugalégu  
Kreden ha fé ou gourdadeu ;  
Elsé bremen é Frans vé desaùet  
Bugalé hemb Doué na lézen erbet.
3. Skarhet ou dès Fréred ha Seurézed  
E boénié get kalz a hred  
Aveit desaù é Frans er vugalé  
É doujans ha karanté Doué :  
Laeret ou dès doh t-hé ou houvandeu,  
Kazi eit nitra é huerhant ou zreu.

4. Skarhet ou dès ag en hospitalieu,  
Eit kol suroh en ineañeu,  
Non pas hemb kin Jézus-Krist hag é groéz,  
Mès hoah béleg ha léañnez :  
Dré gement-sé un nivér a ré klan  
É varù hemb konfort hag e gol en Nean.
5. Klasket ou dès laerein hun ilizieu,  
Draillet ou dès kalz a zorieu :  
Azé èlkent, dirak er goed skuillet  
Ou labour zou bet arrestet :  
Ag en dud-sé aveit donet de ben  
Un dra e zou red : red-é hum zihuen.
6. Hum zihuennamb, ne blégamb ket pèlloh,  
Éneb d'ou roh saüamb ur roh :  
Kerhamb anfin, en dorn en dorn sterdet,  
Hardéh ar hun anemized :  
Araug enta, mar domb tud a galon,  
Araug aveit Doué hag er Relijion !
7. A vihañnoh, kent pèl ind e cherrou  
Hun ilizieu hag ou guerhou ;  
Er vélean fidél vou torbañnet,  
Taufet ér prizon, pé lahet :  
Aveit parrat doh er maleurieu-sé  
Dalhamb de zihuen tré m'hun bou buhé.

---

---

## II. DIHUNAMB, PAUTRED !

DISKAN : *Pautred Breih-Izél,  
D'el lézen santél  
Avèl hun Tadeu ni e vou fidél :  
Pautred Breih-Izél,  
D'el lézen santél  
Bet er marù ni e vou fidel.*

- |   |   |
|---|---|
| 1. Dihunamb, pautred !<br>Mal vou hum dolpein :<br>Er Franmasoned<br>E ven hun flastrein. | 2. Tud kri, hemb kousians,<br>Ind e huch dré zé :<br>Ni ven ag er Frans<br>Ma vou skarhet Doué. |
|---|---|

- |  |   |
|--|---|
| <p>3. Huchamb ni, èl d-hé,<br/>Hag a bouiz hun pen :<br/>Ni fal d'omb-ni Doué !<br/>Inour d'el lézen !</p> <p>4. Doh hun relijion<br/>Grons é omb staget ;<br/>A greiz hun halon<br/>N'hi laméet ket.</p> <p>5. Grons, én drespét d'oh,<br/>Ni zalhoun doh Doué :<br/>Ni varùou kentoh<br/>Aveit kol er fé !</p> <p>6. Doh koartziz, pautred,<br/>Ne faut mui cheleu :<br/>Kerhet dré er bed,<br/>Ihuél hou penneu.</p> <p>7. Hemb doujans na méh<br/>Saüet de zihven<br/>Gredus, è peb léh,<br/>Doué hag é lézen.</p> | <p>8. Dihuen en Iliz,<br/>Rein dehi sekour,<br/>Eid er iouankiz<br/>Na brasèt inour !</p> <p>9. Pautred, étré z-oh,<br/>Sterd mat hum zalhet ;<br/>Hui vou èl ur roh<br/>N'hell bout dijoentet.</p> <p>10. D'er ré fal, nezé,<br/>E vou de grénein ;<br/>Elsen ar nehé<br/>Hui iei ar zoublein.</p> <p>11. Kaeret rékonpans<br/>Vou reit d'oh un dé,<br/>Mar rantet d'er Frans<br/>Peah ha libérté !</p> <p>12. Hoah ur huéh, pautred,<br/>Saüet de zihuen,<br/>Get nerh ha get gred,<br/>Doué hag é lézen.</p> |
|--|---|

TON : *Ave, Ave, Ave Maria.*

DISKAN { *Saüamb, pautred, de zihuen hun fé ;*  
          { *Saüamb, pautred, de zihuen hun Doué.*

### III. GROAMB ÈL HUN TADEU

DISKAN { *Ia ! ni vou perpet*  
          { *Èl hun Tadeu guir Fidéled !*  
          { *Ia ! ni vou perpet*  
          { *Guir Gristénion, guir Vretoned !*

1	Bretoned, e ven bout hanval Doh hou Tadeu a huéharal Èl d-hé, chomet <i>guir Gristénion</i> Dalhet sterd doh hou Relijion.	3	Èl d-hé, <i>de goén ha de viren,</i> Kent hou pred laret ur beden : Èl d-hé hoah de Zoué, hou krouéour Keniget hou <i>poén ha labour.</i>
2	Èl d-hé, pe saüet <i>de vitin</i> Groeit hou peden ar hou teuhlin ; <i>De noz,</i> bras ha bihan tolpet Èl d-hé, ol ar un dro pedet.	4	<i>Pe vou filaj,</i> tolpet, èl d-hé, Serviterion ha bugalé, D'en ol devizet el lézen, Laret ur pennig <i>katechén.</i>

5  
Èl d-hé, *d'er sul* chervijet Doué,  
Ne labouret ket en dé-sé ;  
Èl d-hé, kleuet en *overen*  
Get ur fé biù ha get peden.

6  
Èl d-hé, eit chom ér stad a hrès.  
De *govésat* tosteit liés ;  
Èl d-hé, get guir dévosion  
Tosteit liés d'er *gomunion*.

7  
Èl d-hé, *tadeu, mameu* gredus,  
Groeit d'hou pugalé bout sentus ;  
Eit ou desau keméret poén,  
Kaset ind ol d'er *Skol kristén*.

8  
Pe zeï er hours de *Voéhiéin*  
Èl d-hé, dihoallet a dreisein ;  
Pautred, ne ret hou pilheten  
Meit d'er *guellan dén a lézen*.

9  
Èl d-hé, losket er *fal Livreu*  
Groeit tan get er *fal Gazeteu* ;  
Nen des én hé meit geuier,  
Ha d'er galon é hrant donjér.

10  
Èl d-hé, jamés a *fal soñnen*,  
Mes kentoh kañnet ur huerzen.  
Èl d-hé, nann ! jamés ne grollet  
Er *hrolleu neué miliget*.

11  
Èl d-hé, *doh ivaj* hum hoarnet,  
*Er méz de noz* ne chomet ket ;  
Èn okazion a p'hum lakér,  
Kouh ha iouank, ol é koéher.

12  
Èl d-hé, karet mat oï en dud,  
Doh dén erbet n'hou péet *tabut* ;  
Èl d-hé, béeh reihénhou *konzeu*,  
Reih ha léal én *aférieu*.

13  
Èl d-hé, inouret drest pep tra  
Er *Huerhiéz* ha *Santéz Anna* ;  
Èl d-hé, béeh fidél d'hou *Rozér*,  
Douget dalhmat hou *skapulér*.

14  
Anfin, eid achiù, Bretoned,  
Èl d-hé, hoah, kerhet d'er *véned* ;  
Ar hou tud varù én hou béieu  
Skuillet dareu ha pedenneu.

15  
D'el *Lézen*, pe oé groeit brezél,  
Hou Tadeu e chomé fidél ;  
O Bretoned ! laret èl d-hé :  
*Kentoh merùel eit kol er Fé !*

16  
Ia, laramb ol èl hun Tadeu :  
« Mar vé cherret hun ilizieu,  
« Mar vé amand, mar vé prizon,  
« *Ni vou atau guir Gristénion*.

É Guéned, er 5 a viz Gourhelén.

Mat de vout mollet.

J. LE GUÉNÉDAL, *Vikéï jeneral*.

Priz : *Ur blank*. — *Dek réal* er Hant.

*Get er Hant é rer open dek folen muzik eid en toñnieu.*